

(390, suite)

8 gouere 1828. Recit truezus
 Var sujet an tan-goall horruabl pehini en deveus dêvet en
 antier ar guêr a Salins, departamant ar Jura.

Var ton : Christ bras ar Vur .

Speret Santel adorabl, roit din sclêrijen
 Da zonet da recita d'am breudeur christenien
 Eur maleur an horrupla c'hoarvet dre an tan-goall,
 Pini a laqa en c'kreiz va c'halon da stragal.

Kêr Salins a voa poblet demeus a nao mil den,
 Eur ru ledan e greuje deus an eil penn d'eben;
 Encernet dre menezion e voa evel en cus,
 Cant leo demeus a Paris var rivier Furios.

(391)

Tost d'ar guêr-ze e veler menez Poupant, a zo
 Ouspenn pèrar c'hant gourred dreist ar re all vardo.
 Salins a dle e hano d'e foullou bras holen,
 Hac ar salinen royal, e kreiz kêr zo gempen.

Er guêr-ze e remerqet tyes eus ar c'haera,
 Ithisou ha scolachou en urz ar parfeta.
 Quelet rêt enni ive peb seurt monumantchou :
 Oll int rentet en ludu, sivoas ! gant ar flamou !

En peder heur varnugent eyes bet distrujet
 Ar monumantchou caer-ze, gant an oll admiret.
 Hirio na veler enni nemet spouron ha caon,
 Hac an oll bobl malevus o vervel gant an naon.

An nebeut zo achappet d'ar maleur horrupl-se,
 Privet eus o oll danvez, a gontempl gant true.
 Ar plaçou m'oa o madou, gerent ha mignonet;
 Eur spont horrupl eo sônjal e pez stat int rentet.

En mil eiz cant varnugent, an eiz a vis gouere

60

E crogas, n'ouzer penos an tan baro er guc'er-ze;
 En eur penn demeus ar guc'er voe qenta' remezget;
 An avel a voa qer cren, m'oe dre oll anflammet.

Demeus a fort Sant-Andre, ar c'hanon a alarm
 A denne gant spont horruhl hac ar brassa vacarm.
 Diouc'h-tu ar brisonnerien er mes a voe leusget,
 Rac am na vijent, sivoas! gant an tan-goal d'evet.

(392)

Gant calz a bromptidiguez e voe casset diouc'h-tu
 Da c'houlen buan sicour, ha souden ec'h arvu;
 Mes an oll elemanchon a voa dichadennet
 Erit sicour distruja mam-bro ar Salinet.

Eur tempest eus ar goassa en deiz-se a rene;
 Ar rivier voa disec'het, caout dour den na elle.
 A dal faubourg Sant-Mauric betec an Nor-Huel,
 E tistruje ar flamou, poulset gant an avel.

Eul loden eus ar scolach, calz eus ar Salinen,
 An ilis, an hospital, Ty-kær hac [ar] chasser;
 Ar prison ru Sant Anatol arzo bet preservet;
 Mes, allas! ar rest a qu'er zo en ludu rentet.

Gen spontus voa an avel, ha gement furoret,
 Ha zeus cavet dillajou var hed teir leo stlapet;
 Ha memes tremen deg leo en tu-all d'ar guc'er-ma
 E zeus cavet paperiou deus ar preciusa.

(393)

Ne voa qet avoalc'h quelet kær en tan ha ludu,
 Bandennou laeron enni zo diredet diouc'h-tu.
 Mes souden e voent trapet, casset da Vesangon,
 Ha da c'hortos o setanç dastumet er prison.

Breudeur an Doctrin-Gristen, e creiz ar reus bras-se,
 Pompèrien Kær Besangon, ar zoudarded ive,
 Goude beza grêt deg leo en eur reded buan,
 Na quemerjont nep repos gen voe lazet an tan.

Ur dra estranch eo quelet en eur maleur qer bras,
 Pequen nebeut eus a dud eno a berissas.

Ma voe calz savetaet dre vercou burzudus,
E zeo dre 'r brassa miracl ha dre c'hraç a Jesus.

En nombr demeus ar re-mâ e voa eur plac'h yaouanc,
A voe clasqet gant e mam, mes ar plac'hic qeiz blanc,
Vit savetaet e c'herent voa re n'em exposit.
Dindan un treust en ur c'haos, mes yac'h e voe cavet.

(394)

Epad pemp devez antier, priwet a sclêrijen,
O teport heur e maro, dilezet gant peb den,
Ne devez bet da veva nemet un tam bara
A gavas en eur c'hornic eus ar plaç teval-mâ.

Ar maleurion general a ro lec'h alies
Da actou bras a vertus a deuer da zisques:
En o zoues e remercomp hini caer un noter,
Pehini e peb amzer a zervicho da squier.

En e dy voa deposet ar som a bemp mil scoët,
Hac eur som all en devoa pell-amzer espernet;
Dre n'elle get cass gantân an daou som assambles,
E roas ar breferanç d'ar c'henta tout expres.

An ezomou ar brassa a rê en em santout
En nos an nao varnuquent etouez an oll partout;
Souden habitantet Tol a zastumas bara
Da zigas da Salinis, dibourve a bep tra.

An deiz varlerc'h e veljot bourc'hisien Besançon
Oc'h arnuout e Salins gant peb pourvision,
Qerqent bars en ty commun e voe oll deposet,
Ha ractal ive neuze d'an oll distribuet.

(395)

Admiromp oll, Bretonet, charite ar beorien;
Goude beza recevet bara an aluzen,
O redet da vont d'e rei d'ar re, nebeut gent se
Voa pinvidicoc'h quete, mes deut paour evelte.

Selaouit oll, va brois; selaouit gant eston
Ar pez a scrifas neuze d'e zad voa en Lyon,
Ur seurez yaouanq demeus a hospital Salins,

Var horroliou an tan-goall a zezol ar broving :

» Bezit tranquil, va zad qer : me ne meus drouc abet,
 » Daoust ma zoun bet alies dre 'r flammou encarnet.
 » Hon hospital hep mui qer e creiz kaer zo salo ;
 » Mes evit an oll d'yer zo devet tro-vardro .

» Ne fell get din merca dec'h pezh spouron hon eus bet
 » Aboe demerc'her divea, da ziv heur tremenet :
 » Pa vezimp n'em discuzet, me a zetaillo dec'h
 » Maleurion ar re vrassa vae biscoas e nep lec'h .

» Ni eo a zeu da vezur qeris ha pomperien,
 » An oll autoriteou, soudarded, archerien .
 » Hon refectouer hirio zo deut commun d'an oll ;
 » Ha var ar vein e clasomp an neryz omp deut da goll .

» Diou nosvez hon eus collet hep cavet nep repos ;
 » Mes e creiz eur seurt horrol, ec'h ouzomp mad penos
 » E zeo eur boneur beza seurez a hospital,
 » Pa eller eurusamant rei sicour d'an dud all ...

(396)

» Dre eur miracl ar brassa e zeo bet espernet
 » Hon hospital eus an tan, en deus oll distrujet .
 » Pebes tria horruabl ez eo guelel eur quater e tan !
 » N'ellan get despeign ze dec'h, rac crena c'hoas a ran .

» C'hoec'h cant tri-uguent famill zo er brassa mizer
 » Hep eur rochet, na dillad, nac un dra necesser .
 » En tri c'hant-heur pevar c'hant ty a zo bet pulluc'het :
 » Da dost da nao million eo ar c'holl estimet .

» Cheffou ar gouarnamant a zo deuet souden
 » Dre sommon bras da zicour en e ezom peb den .
 » Tud eus a bep qalite, eus a greiz o c'halon
 » O deus comprenet maxim ar quier religion .»

» Un den yav anq ditanao, deus ar quater a Lyon,
 » Deus ur famill pinvidic, touchet bras e galon,
 » A recevas pemp cant livr demeure abers e dad,
 » Evit en em amusi er bal hac en ebat .

(397)

« N'elfen bigen, emezjan, dont d'en em amusi,
 » Pa velân tud maleurus en glac'har hac en cri. »
 » Laquet a eure renta ar som bars en antier
 » Da eur seurez a Salins vit an dud prour a guer.

« Eur plac'hic a bemzec vloas, eus un debit butun,
 » A ras un action gaer, mar boe biscoas nicun:
 » Mestrez eus a druzec scoët, e deveus o roet
 » Da zicour dont da soulach an dud qez revinet.

« Eur scolaer pèvarzec vloas, en Paris er scolach,
 » N'em applique d'ar studi gant calz a avantach;
 » Dastum a rê e arc'hant gant calz a jouissanz,
 » Erit prena ur fusuill vit amzer ar vacanz.

« Ar buquel interessant a voezas ar maleur,
 » Erruet en kêr Salins; ha ractal var an heur
 » En em inform gant soign vras qement voa erruet,
 » Ha penetret e galon, e zeo oll glac'haret.

(398)

« Mont a ra da gasout e vestri, a zalc'he e arc'hant,
 » Hac er ped en han' Doue neuze incontinant
 » Cass e arc'hant da Salins evit ar buanna,
 » Ha na viras evitan nemet nebeut a dra.

« An tād, ar vam, glac'haret, a glasq o bugale;
 » Mes ar flammou a zevor an eil hac equile;
 » Ne veler var bep bisach nemet an desesper,
 » Nemet cri, spont hac horrol na zeus e peb qarter.

Doue, Salver adorabl! pelloit ouzomp bepret
 An tan-goall gen horrerus, hon rent desesperet.
 Distroit dirar hor Breiz peb goal adversite,
 Ha grit deomp en em garout dre eur quir garante.

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 390-398.)
 38 str. numérotées.